

KIS-422 – Gl. expansion

(YVT, GC, HK, GE e stern BAYA – 25 05 92)

Heuliañ a raimp isrannadur *Lexis*.

I. – KEMERADURIOU SKIANTEL

I a. – EXPANSION

I a 1. – (Fizik) Kresk ec'honad pe / ha gorread ur c'horf alvezel. Kenster Gl. : **dilatation**. Br. **arledañ**. Sk. : “Stibiom [...] metal gwenn strinkennek, dezhañ ar perzh **arledañ** o sonnennañ” hervez Da-63, p. 79.

I a 2. – (Fizik) Kresk ec'honad un aezhenn endra zigresk ar gwask. Br. **deledañ, deled** g. Sk. : “**Deled** an aezhennoù a ampleg o bezañ hevoustr.” SADED Fiz. 20, p. 1 ; Da-64, p. 44.

I a 3. – (Korfad., Louzaw.) Astenn eus ur gellig, ur gwiad, un organ diwar ur poent anezho. Br. **azledañ**. An astennad o tisoc'h. Br. **azledad** g. Sk. : “Blevan kreniat : **azledad** kitoplasm e furm ur biz maneg.” [Gl. “*Cil vibratile : expansion cytoplasmique en doigt de gant.*”] GEVEms.

I a 4. – (Yezhon.) Amañ ez eilrannimp mellad *Lexis* :

I a 4 α – (Steron.) Perzh hollek eus ar prezeg oc'h argerzhañ dre ouzhpennañ didermenadoù kenheuilh. Br. **dourmac'hañ, dourmac'h** g.-ioù (< hBr. *doguormaheticion* "nominibus adiectis").

I a 4 β – (Steron.) Dispakadur arganteulioù un termen o tisoc'h gant an *despizadur* (Gl. "*définition*"). Br. **dezledañ**. Ar wezhiadenn c'hin eo an *dazbec'hiañ* (Gl. "*condensation*"), o tisoc'h gant an *deanvadur* (Gl. "*dénomination*").

I a 4 γ – (Arouezon.) “Elfenn ouzhpennet d'un dezrevell hep ma ve kemm er c'hengeñverioù nag en arc'hwelioù an elfennoù kentvezant [...] elfenn nad eo ket diziouerus en un dezrevell.” MARTINET, *Éléments de Ling. génér.* Br. **azdod** g.

I a 5. – (Steredon.) Hervez arlakadenn DE SITTER (1917), kresk kendalc'hek ec'honad an alvez. Betek gouzout e kinnigomp Br. **ec'honiñ**, **ec'honidigezh** b. (o virout amañ ag ober gant *ec'honad* arveret endeo gant ar ster "mentad termenet evel liesad ur gorread dre ur regad, L³", Da-63, pp. 37, 38).

I b. – EXPANSE

I b 1. – (Hollek) Br. **deledet**, **dispaket**, **dispak**, h.a.

I b 2. – (Kalvez.) Diwar-benn an danvezioù mezell kresket o gannad¹ dre reiñ dezho ul luniadezh a-gelligoù. Br. **deledet**. Sk. : “Ar mezelloù **deledet** a anver c'hoazh eonenoù mezell.”

I c. – EXPANSIBLE

Br. **deledus** aa. Sk. : “[An aezhennoù zo] **deledus** (da lavarout eo e tennont da gaout brasoc'h ec'honad bepred).” SADED Fiz 20, p. 1.

I d. – EXPANSIBILITE

Br. **deleduster** g.

II. – KEMERADURIOU BREDEL

EXPANSION, EXPANSIF, EXPANSIVITE

Lusk o tougen un den da ziskouez e drivliadoù. A-gostez e lezimp kemeradurioù ar rumm-mañ, o taveiñ da notennoù all ma'z eo bet boulc'het o studi, KIS-380, La-09, p. 274 ; KIS-405, id., p. 414.

III. – KEMERADURIOU ARMERZHEL, KEVREDADEL, POLITIKEL

III a. EXPANSION

III a 1. – (Hollek) Kreskiñ, dispakañ, diorren, kemer nerzh, levezon. Br. **kresk**, **lammgresk**, **dispak**, **emled**, **emastenn**. Ouzhpennañ a c'haller deveradoù diwar **ragor-**, pennrann arveret er c'hramadeg betek henn (sl. **bonragor**, **eilragor**, SADED Yad 0, p. 2 ; La-01, p. 75 hh.), o korvoiñ an durc'hadur ster a oa gant

¹ Kemm a lakaer etre *ec'honad* (*rik*) ur c'horf, parzh ec'honder gouzalc'het gant an danvez anezhañ, eleze, e tro ar mezell *deledet*, oc'h ezwerc'hañ aezhenn ar c'helligoù hag ar *gannad* (pe *ec'honad krai*), en degouezh-mañ ec'honad rik ar mezell mui ec'honad an aezhenn entoueziet.

hBr. *recorim* "s'élancer en avant" DGVB. p. 295. Sk. : “**Emastenn** ur gêr.” “**Lammgresk** un ijinerezh.” “**Emled** ur sevenadur.” “**Ragorad** an Islam en Afrika.”

III a 2. – (Politik.) A-zivout ur riez, kreskiñ he holierezh er bed ha da gentañ he ziriegezh. Br. **emledañ**, **emastenn**. En tu all d'an daou dermen-mañ, hollek ha dispis a-walc'h, e kredomp kinnig unan all, strishoc'h e erdal, a zo **trac'hantañ**, oc'h adkavout an durc'hadur ster a zo gant (-)kant(-) e-barzh *amgant* (sl. *Emsav* 14, p. 66 ; *Emsav* ha *Preder* passim ; Kb. *amgant* "circle, compass, bounds ; region"), *eskantañ* (sl. *Preder* Da-St. p. 38), *kengantañ* (sl. *Emsav* 2, p. 15 ; 54, p. 200 ; 122, p. 58 ; *Preder* DGYA A-4, pp. 21, 22, 28), *kantañ* (sl. *Emsav* ha *Preder* passim ; *Preder* 203, p. 35). Ent vellek ez inteter **trac'hantañ** evel "mont en tu all d'ar c'hant, d'ar bevennoù, d'an harzoù" : a-vec'h e ranker divellekaat evit emgavout gant ar c'hemeradur ambredet. Sk. : “**Emled** ar Gelted dre Europa.” “**Emastenn** an Impalaeriezh Roman.” “An **trac'hantañ** trevadennel.”

III a 3 – (Armerzh.) Kresk ar c'horvoder broadel. Br. **kennez** g., (< Kb. *cynnydd* "growth, increase ; [...] progress, advance ; development ; [...] supremacy, conquest, rule" GPC 797) **kennezañ** (sl. KIS-099, La-05, p. 81). Kontrol ar **c'hennez** eo an *enkil* (Gl. *récession*).

III b. – EXPANSIONNISME

III b 1. – (Politik.) Reizhiad politikel o kemer da bal astenn an diriegezh. Br. **trac'hantouriezh** b. Deveradoù all a c'haller empentiñ hervez an arlivioù ster : **trac'hanterezh** g. a ve an trac'hantañ renet war an dachenn, h.a.

III b 2. – (Armerzh.) Leviadurezh ur gouarnamant, ur gennad armerzh, un embregerezh o kemer da bal ar c'hennezañ. Br. **kennezouriezh**.

III c. – EXPANSIONNISTE

III c 1. – (Politik.) Br. **trac'hantour** aa. & g.-ion. Sk. : “Leviadurezh **trac'hantour** riezoù Europa en 19^t kantved.” Deveradoù all a c'hell pourchas ar brezhoneg hervez al lostgerioù boaziet : **trac'hantelour**, **trac'hantidik**, h.a.

III c 2. – (Armerzh.) Br. **kennezour** aa. & g.-ion. Sk. : “Skoilh a sav ouzh ar spered **kennezour** diwar an damant d'an trevva.” Heñvel dra a-fet deveradoù bezus : **kennezelour**, h.a.